

War don: Ni ho salud,rouanez an ele,
pe:Spered santel,spered a sklerijen
pe:True,ma Doue.

Diskan:Ni ho salud,Mari,mamm ha gwerc'hez,
Ha gwir bried Spered a zantelez,
Prizet kemer 'vit gwalen/ a eured,
Ar bizou-man ganimb d'ac'h kinniget.

Brank tener deuz gween ar Brofeted,
Bleuen an Nenv 'zo n' ho kalon krouet,
Ar men ialp glaz a verko d'imb ar Fe,
Dre-z-hi kredfoc'h da gomjo el Doue.

Ho Esperanz na vranskellaz kammed,
Ar wirione 'n ho sonj stard oe bepred,
Lakomp c'hoaz 'ta 'n ho kwalenn ar safir,
Dre he liou pers 'verk ho fianz ken hir.

Ar c'halsedoan ken skler,ken lugernuz,
Kalz-kalz kaeroc'h evit an de skeduz,
Diskoueo d'imb tan bras ar garante
A entanaz a viskoaz ho ine.

An emeroñ ken lufroz ha ken glaz
A laro d'imb ho vertuio ken bras,
Dre ar sardoan didach,dinam,ha gwen
A c'hanvefomp ho gwerc'hed pen-da-ben.

Ar sardoan ru a verko ar gouli
groet d'ho kalon gant ar c'hleve,Mari,
War ar C'halvar dirakoc'h pe varvaz
Ho Mab Jezuz teir eur stag ouz ar groaz.

Ar c'hrizolit lugernuz evel tan,
Ho purzudo laro da bep unan;
Hag oüspen c'hoaz an huellan furnez
A bergarge ho ine,o Gwerc'hez.

Ar cerylhgoan,en he liou ken tenval,
'Dol kouskoude eur sklerijen raktal,
Merkan red d'imb izelder ho kalon,
'Vit an nissan ho karante gwirion.

Talvoudusoc'h ha kalz muioc'h lintruz
'Vit ar vein all,melen ha prisiuz
An topaz 'lar penoz ebarz an Ne
C'houi wel Doue mui 'vit Zent hag Ele.

Ar C'hrisopraz livet en mouk hag aour
Ho karante a diskoe^dan dud paour,
Ar hyasinth livet evel an er
A diskoueo ho sikourio zeder.

An amethyst a verk ar garante
'Neuz evidoc'h an oll dud ha Doue,
Merkan 'ra c'hoaz an deneridigez
'Neuz pep kristen 'vit he vamm ar Werc'hez.
(Var.:Nevoa Jozeb 'vit he bried Gwerc'hez.)

Stagan a rin eur gaer a berlezenn
Ouz ho pizou 'n eun ober ho kwalenn;
Evruz a lar Jezuz en Aviel
Neb a gavo eun tenzor ken zantel.

An agath vraz ha tenva he fenn
Ha marellet gant kalz gwazenno gwen,
'Verho d'an oll ho kaeran zantelez,
Dre-z-hi plijet da Zoue,o Gwerc'hez.

An Onyx flour ha marellet he liou
A laro d'imb ho c'holl donezonou,
C'houi pehini 'zo bet diouganet
Ha gortozet gant ar gwir Brofetet.

Ho kalloud vraz an diamant 'verko
Rag stourm a ra ouz an oll vorzolio:
Ha c'houi,Mari,'zo bepret chomet
'n ho poanio kri leun-tre a habasked.

Ar strink-gwer fresk a lar peuc'h ho ine
Glander ho korf hag ho kalon ive.
An elektra 'verk ho tilontegez
Ho toujans vras hag ho c'holl madelez.

Stagan refomp ar Men-touch ken kalet,
Rag gant-han 've an houarn krenv tennet,
'N hevelep stum dre ho kwir trugarez,
Tennet ganac'h hon c'halono,Gwerc'hez.

Ho prud ken mad dre beb lec'h embannet,
Dre 'n eskarboukl lugernuz 'vo merket,
Ha c'houi,Mari,mamm an oll vertuio,
Glan a bec'het,reit d'imb lod / 'n ho choaio.

Gant an aour deuz an Arabi tennet,
Hon deuz stummet ho kwalenn a eured,
Kerget eo a bep seurt mein prisiuz,
Kemeret-hi,o mamm garantezuz.
(Var. Kemeret-hi,Pried Jozeb evruz.)

signé:Person Tredrez.

Copie faite sur le mss autographe. Propriété de MG
Ne semble pas avoir été publiée dans Kroaz ar Vretoned.